

226

Ar fol° 14 2°, titra (an crayon): Stang Bizien Kloarek Kicuff 5

Stang Bizien (Kloarek Kicuff).

(f° 14 verso)

Me ho ped, Spered Santel
Em daoulin plezisset
Roet din hoc'h assistans, sklerijen d'am spered
Evit gallout lavaret ar Kruel accident
Arriet gant ur famill, bars ar bloavez present.

Er bloavez mil a seiz kant choec'h a pevar ugent
~~En~~ (1) bars en parous Ploezal eo eur malheur erruet
En ur lignès honorabl, honorabl deus an douer du
Ar map enan an ei a voa ka Kicuff.

Un devez he savas, goude dijuniat
Hag con monnet en kaer da glask kamaradet
Pedi he ra an-e evit monnet gantan
Hini a-ne na nes, ag con da partian.

Kemer a ra an hent mond gantan pen da pen
Chasseal a eure betek ar Stang Bizien.
Peo arriet ennon e neus prest remerket
Un nombr bras ha maligne voar an dour o reded.

Neuz he neus klasket an tu voar an essa
Da nom lakat en plass evit c'habout tenna.
Voar nij oll he savjont, he tenn prompt e lostas
Hag he neuz tiet unan mez en dour he kouezas.

Un triovac'h pe un naontek he waik en ur vanden
Ag hi da nijel ac'hane ha tremen hus d'he pen.
Chom a eure enon betek heur a Kreiz de
ho sonjal gant amzer d'ar bord a testaje.

(f° 15 verso)

Bezan e voa chass gantan allas ne wouiaink ket
Monet ebar an dour da tappout lapousset.

(1). - e, écrit en surcharge sur: en.

A pa considere ebars ar rarete
 Ac en iver immanç a nevoa ar cign kaer se .

Toll e rez voar an douar he arm ag he dillad,
 Pedi e ra ar verc'hez pedi he ra he ell mad
 Tuot he voa en bord ar stang ha nevous dean laret :
 he hed arze hen danjer da vean siouas beuzet .

Eun amzer kri dinatur ag ur tempest a re
 He c'houraj en delchas evit mont evelse
 Pa voa tappet ar cign a d'Jued gantan en dro,
 Ar skorn bras en arze d'ha zont woar he pejo .

Ma neum gavas yenet, skornet kalon ha goad
 Haq eon kommand d'ha Kriall sikour eur re benag .
 An oac'h ag ar mevel deus a milin Bizien
 P'o kleojink ho c'hervel a diredas soudan .

(f° 16 verso)

Pa int arruet enan voa o koach gant an dour
 O possubl ho deus graet en aris e sikour
 Ar skornen a dinarnan siwas a zo torret
 Ed eo d'ha gwelet an dour nag eur tregont koured .

Meuntred he voa ho c'halon a sikour n'allaink ket
 Pelleet he voa deus ar bord nag eun triwarc'h troatet .
 Entre diouvrac'h Jesus e rentas he hine .
 Bezan he voa eun den a vertus mad e voa er c'hontre .

Ur porteur iaouank a voa deus Koat an Nay
 A yeas d'ha Kicuff d'ha gass ar chelou ze
 Laret he ress d'ha genta he voa beuzet un den
 O chassal mal cign ebarz en Stang Bizien .

Nouffe din lavaret pegement a silanç
 A hirvoud a glac'har a voa ebarz an noblans
 Pa arruas ebarz an ti an arm ag an dillad
 Ar re man eme an otrou a zo dillad ma map .

Pa arruas an itron a klevet ar c'helou
 Ag hi ho simplout enon entre dirrach an otrou
 Otrou Doue emezi maro eo ma map

228

Maro eo ma bujel ker pa gwelan he dillad (1).

Kasset e voa da pontreo da vid ur vag nevez
 A mont betek Stank Bizien da chout ar virionez
 Kasset e voa meur a messaj da vont da glask ploujerien
 Da denna ar Korf paour demeus ar Stang Bizien.

(f° 17 verso)

Ker kaer evelt ar loar an eol ag ar steret
 He voa korf an den icouant deus ar stang pa voa tenet
 Ha woar poul he c'halon eun imag biniget
 Da mervel en kristen mad a neus an sikouret.

Douget e voa ahane map Kuzezek Kicuff
 Na zeuas ket ar justis demeus a roc'hjaou
 Abalamour d'ar respet e voa douget er bro
 D'ar famill heñ honorabl a voa oll en kanvio

Ar sao demeus he c'horf voa gret en verret ploerjal
 An offis ebars an ilis ag enterri ractal
 Den he voa a galite, karget deus a vertus
 A map enan e voa demeus a Kicuff.

7

Made de St Brieg.

(1). - Le d (de dillad) écrit en surcharge sur un z.